

leKiosque e x p o s i t i o n s

Evit pep diskouezadeg e kinnig skipailh
ar C'hledour gweladennoù heñchet
a-hiniennoù pe a-stroll. Miret dre bostel
pe e degemer ar C'hledour.
Monet e darempred genomp
d'an 02 97 01 62 27
Digor bemdez
10e-1e / 2e-6e
Hanterouriezh sevenadurel
contact.kiosque@mairie-vannes.fr



Aurélia Frey & Emmanuel Faivre
**Bourbl ar
re Dianket**

**3 Ebrel
> 14 Even
2026**



Renkadur ar C'hledour - M'ar Gwened © Aurélia Frey

Ma anv :

Ma anv-bihan :



Demat, donemat en diskouezadeg nevez-mañ er C'hledour.
 Aurélia hag Emmanuel omp-ni.
 Aurélia a dap luc'hskeudennoù evit kontiñ istoerioù diàr skeudennoù.
 Emmanuel a enroll klevedvaoù.



Gwezharall
 e oa martoloded hag a yae kuit e bourzh bagoù.
 Monet a raent pell-pell-pell.

Evit pesketa.
 Pell e pade ar veaj.

Bras e oa ar mor.
 Yen e veze lies-mat.

Pa vezent àr vor
 e soñjent en o zi.

Pa zistroent
 e oant laouen é welet o familh en-dro.

Dit da c'hoari !
 Klask hag e kavi...

→ An tudennoù-mañ




→ An objedoù-mañ :



→ Klevedvaoù ha sonioù an natur :

Kerzh e-kreiz-tre an diskouezadeg ha selaou pervezh doc'h ur son. Petra a glevet ?
 A-ven e ta ?

Liamm ar son pe ar sonioù ac'h eus klevet doc'h ar bir mat.



Dit da c'hoari !

Hañval genit ec'h ous àr vor é vonet trema Island ;
 Tres un dra arivet e-pad da avantur, un dremmvro...

